


KANTIK**ZANT WELTAS***(Pares Laniskat)*

Moulet gand Otreadur an Eskopti

WAR TON *Kantik koz Laniskat*, PE TON *Kelven*.

DISKAN :

Kristenien an Amorik, ha ni oll Vretonet,
 Meulomp oll a greis kalon hon Patron binniget.
 Meulodi da zant Weltas ken mad evit hon bro,
 He vennoz war hon Pares ha warn-omp tro-war-dro.

1. — Anken, glac'har, melkoni, spont ha tewalijen,
 Setu stad hon tadou koz, arog ar sklerijen, —
 Sklerijen ar Baradoz 'vit hon zilvidigez,
 Hag a diskaei d'an ine hent kaer ar zantelez.
2. — Neuze, skedus 'vel an heol pa bar da c'houlou de,
 Zant Weltas war dû hon bro gant prez a direde ;
 Ha dirak han an diaoulou, enn eur grial spontuz,
 A dec'he timad arog an den ken galouduz.
3. — Pur a gorf hag a galon, leun a wir garante,
 Noz-de a pede Doue : james na dihane...
 Noz-de c'hoaz, ha hep paoues, fade he binijen.
 Pebez nerz evit prezeg Lezen ar Gristenien.
4. — Enn Gwened hag enn Kerne, hed a hed da *Vlaves*,
 Ped ha ped war he roudou glaske ar zantelez.
 He vurnez hag he gomzou ho douge a vanden
 D'an Envou gand an OElez kreiz ar gloar da viken.

5. — Setu *Komor* 'n he gastel, *Komor-ar Miliget*,
Muntrer *Triphin* ha *Tremeur*, ouspen meur a dorset.
Pa zavas ar zant he dorn, *Komor* braz a grene
Hag he gastel dismantret a bep tu a goueze.
6. — Dreist d'an oll burzudou kaer bet groet gant zant *Weltas*
Eo zantes *Triphin* maro ha deit d'ar vue c'hoas.
Evelse re hon *Zalver* gwechall war an douar ;
Evelse ra kalz a zoent, arog zewel d'ar gloar.
7. — O zant *Weltas*, hon *Patron*, mignon ar *Vretonet*,
Nhi fell demp hoc'h enori, hag ho karet bepred, —
Ho karet a wir galon — ha d'ac'h fidel dalc'hmad,
Nhi fell demp mont gant an hent digor dre ho skouervad.
8. — Deut d'honzikour dre hoc'h nerz, etouez hon trubuilhou ;
Hon miret, tud ha loened, etouez hon labouriou ;
Pelleit pell ar c'hlenvejou, peb droug ha peb goalen ;
Groet ma plijo gand Doue chilaouet hon feden !
9. — Mantret bras eo hon c'halon, hag hon speret nec'het,
O welet an dud fallakr, gand ardou ha pec'het
O klask koll ar vugale, ha harz ar iaouankis
Da servich Doue hon Tad, hag hon Mam an Ilis !
10. — Euz lein ho tron lugernuz, groet eur zellik ouzomp :
Enn draonien-man a dañlou, alies a skuizomp !
Ha, pa deñ tol ar maro, groet ma vimp everuz,
O nijal d'ar *Barados* gant *Mari* ha *Jezuz* !

Imprimatur :

Brioci, die 22 Novembris 1900.

A. CHATTON, can., vic. gen.

